

(49, suite)

Læm ar Yaouanqis.

P'edon o ren va yaouanqis,
 Guir vella em plijadur,
 Me voa carg'et a friantis,
 G'ye, laouen, m' en assur:
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 (50) Ne meus mui nemet nec'hamant,
 Var va zreid e tizec'han.

Goechal m' en boa diouz ay dousen
 Galantet d' ay c'hondui;
 Brema eo goal ver ar vanden
 Nemeus get unan mui.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 Nemeus mui nemet nec'hamant,
 Var va zreid e tizec'han.

Renet emeus ay ebatou
 Betec beza demezet;
 Chenchet oll eo va maniellou,
 Va friantis zo quezet.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 Ne meus mui nemet nec'hamant,
 (51) Var va zreid e tizec'han.

Me zanje din, pa zemezen,
 Edon o vont d'an ebat;
 Guelet a ran en em dromplen,

Var ton:

Brema emeus mil bazat.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 Nemeus mui nemet nec'hamant,
 Var va zreid e tizec'han.

Var va feñ, hep reflexion,
 Emeus qerzet d'am malheur;
 Guerzet va yaouanqis quision,
 Ha guerzet va oll bonheur.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 Ne meus mui nemet nec'hamant,
 Var va zreid e tizec'han.

(52) Dindan eur mestr ez on breman,
 Goechal me a voa mestrez;
 Pebez chenchamant eo emañ!
 Doujans e lec'h carantez.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;
 Nemeus mui nemet nec'hamant,
 Var va zreid e tizec'han.

Goechal me rae va zantimant;
 Brema dindan va boutou
 E voustran va himor ardant
 En am rac caout bazadou.
 Allas! brema eus chenchamant,
 Ne c'hoarzan na ne ganan;

134

Nemeus mui nemet nec'hamant,
Var va zneid e tizec'han.

Geuzi d'am amzer dremenet
A ran meur a vech bennez;
Ne ve, pa nefe m'ouy nasqet,
Ar vech-ma c'hoaz dizemez.
Allas! brema eus chenchamant,
Ne c'hoarzan na ne garan;
Nemeus mui nemet nec'hamant,
Var va zneid e tizec'han.

(53)

Mes petra a dal din-me geuzi?
Collet eo va liberte;
Ne allan mui dizemezi,
Ferm eo va c'haptivite.
Allas! brema eus chenchamant,
Ne c'hoarzan na ne garan;
Ne meus mui nemet nec'hamant,
Var va zneid e tizec'han.

(Vol. II, p. 49-53.)